

GWIR VRETONED

74 KANAOUENN

Mouladur klok gant an tonioù hag ar c'homzoù

RAKSKRID GANT MAOZEZ GLANNDOUR


SKOL 1965

Niv. 28 . 29


BRO GOZH VA ZADOU




1. Ni Breizhiz a galon kar-omp hon gwir vro ! Bru-det eo an




Arvor dre ar bed tro - dro ! Dispont 'kreiz ar brezel hon



tadoù ken mat a skuilhas e- vit- i o gwad.



Diskan
O Breizh ! Va Bro ! Me ' gar va bro, Tra ma vo



'r mor 'vel mur 'n he zro, Ra ve- zo di- ga- bestr va bro !

2. Breizh, douar ar Sent kozh, douar ar Varzhed, N'eus bro all a garan kement 'barzh ar bed,
Pep menez, pep traonienn d'am c'halon 'zo ker: Enno kousk meur a vreizhad taer !

3. Ar Vretoned a zo tud kalet ha krefn
N'eus pobl ken kalonek a-zindan an
Gwerz trist, son dudius a ziwan end
O pegen kaer ez out, va bro !

4. Mar dao bet trec'het Breizh er brezelioù bras,
He yezh a zo bepred ken bev ha biskoazh,
He c'halon virvidik a lamm c'hoazh 'n he c'hreiz,
Dihunet out bremañ, va Breizh !

(Savet gant Taldir war un ton kembreat :
'Hen Wlad fy Nhadau)

KAN-BALE ARZHUR

Energico

Deomp, deomp, deomp deomp, deomp, deomp d'ar gad ! Deomp
 ker, deomp breuz, deomp mab deomp tad ! Deomp, deomp, deomp holl deomp
 'ta, tud vat !

2. Mab ar c'hadour a lavare,
 !Lavare d'e dad ur beure :
 - Marc'hegerien war lein ar bre !

3. Marc'hegerien o vont e-biou,
 Mirc'hed dindane, glas o liv,
 Hag int o ruflet gant ar riv

4. He stank-ha-stank, holl ez sont-i,
 Ha c'hwec'h-ha-c'hwec'h, ha tri-ha-tri,
 Mil goaf ouzh an heol o lintrif.

(Barzaz Breiz)

KAN-BALE NEVENOE

Skoul-met mat eo hi-rie cha-denn ar gos-ko - red. Kous-ket noz
 Kous-ket de Ka-lon ar Vre - to - ned. Nag eo du an noz
 Nag eo du an de

D'ar-ga-dou-rien bro di-bal Di-soñ-jet krenn eo o a-no.
 Din - dan gwask pon-ner ar Gall. Piv a sam-mo bir ha kle-zo ?

Ne-ve - no - e Ne - ve-no-e Ne-ve-no - e.

2. Met un deiz e c'hwezo
 Avel Menez Arre;
 Met un deiz e luc'ho
 Tangwall Menez Kerne.
 Ra vo dihonet
 Nerzh ha lozc'h an argadour
 E skeud ponner ar Gwenn ha Du.
 Ra vo disantret
 Korf na gwad an enebour.
 N'eo forzh peneos e vo ludu.
 Nevenoe, Nevenoe, Nevenoe !

3. Skeud an trac'h war o dremm
 Ho pugale 'ya d'ar brezel
 Gorn kalet, lagad lemm,
 Stagañ 'raint war-du an aval;
 Gant tan ar serr-noz
 E don o daoulagad
 War ar c'huzh-heol ez aint fenozh.
 Gant youc'h ar re gozh
 War leuzenn an argad
 Ar re yaouank 'varvo fenozh !
 Nevenoe, Nevenoe, Nevenoe !

(Ton ha komzoù savet gant Glemmor.)

AN ALARC'H

LAm *Mint LAm* *Mint Sol7*

Un alarc'h, un alarc'h tra-mor, un alarc'h, un alarc'h tramor, War
 lein tour moal kestell Arvor ! Din din dan ! d'an emgann ! d'an emgann !
DO *Rein* *LAm* *Mint LAm* *FA*
 O ! din din daon, d'an em-gann ez an !
Mint Rein *Mint LAm*

2 Neventi vat d'ar Vretoned,
 Ha malloz ruz d'ar C'hallaoued !

3 Erru ul lestr e pleg er mor,
 E ouelioù gwann gantaf digor,

4 Degouezhet an Aotrou Yann en-dro
 Degouezhet eo da ziwall e vro.

5 D'hon diwall diouzh ar C'hallaoued,
 A vres gwirioù ar Vretoned.

6 Ken e laosker ur youc'hadenn
 A ra d'an aod ur grenadenn.

7 Ken e tesson menezioù Laz
 Ha ken e trid ar gazeg c'hlas

(Tennet eus ar Barzaz Breiz)

GWIR VRETONED

Sol *DO*

Gwir Vre-ton-ed, tud a ga-lon, war sav ! Da ga-nañ
Sol *Re7* *Sol*
 gloar da Vreizh hor Bro, Ha da zi-wall tef-zor he yaouank-
DO *Sol* *Re7* *Sol*
 iz, Ar yezh, ar peoc'h hag ar fran-kiz. War-sav ! War sav !
DO *Re7 Sol* *Re7 Sol*
 da ganaf 'bouez penn : Breizh da virvi-ken ! Breizh da virvi-ken !

O va Breizh gant da douzioù brudet, Da vor glas. ha da ve-nez-
 ioù, Da vrug ruz ha da lann a-lacu-ret, Te zo koant dreist an holl
 bro.

Diskan
 ioù. Gwir Vreton-ed, tud a ga-lon war sav !

2. Ne 'z eus ket, 'val e-touez hor c'herreg,
 A dud vat, seder ha nezhus;
 Ne 'z eus ket, 'val en hor brezhoneg,
 Sonioù drant, gwerzioù dudius

(Pactr Treouere, war ton "Sesiz Gwengamp" eus ar Barzaz Breiz)

DALC'H SONJ

Dalc'h soñj, o Breizh- I - zel, eus an am - zer 'raok ma oas gwer-
 zhet ha trec'h - et! Pa c'helle da vi - bien ker - zhet se -
 dez, Sonn o fenn, di - nec'h o spe - rad, 'Raok ma oas bet
 tao-let hep di - fenn ha paour Dinden seu-lioù pon- ner an es-
 tren, Ha sta - get da vi - ken ouzh e gar-rofs aour, Duzh
 da dreid ken te - ner ur cha - denn!

2. Dalc'h soñj, o Breizh-Izel, eus ar re gozh
 O deus luskallet da gavell !
 E pep traonjann ha war gribenn pep roz
 E klevi o mouezh en avel.
 An avelioù a c'hwez war da blaennoù
 A zoug eneoù ar Vzetoned,
 Hag a lever dit bemdez en o c'hlemoù :
 Dalc'h soñj eus da enzer dremenet !

.....
 (Taldix-Jaffrennou, war un ton iwerzhonet)

AN HUNVREOU KAER

Pa'z omp aet en hent e - do tarzh an deiz o c'hou- la- ouñ
 drant kern me - ne - zioù Breizh, Hag e kan - emp holl hag e kan - emp
 hir D'hon huf- vre-où kaer a oa deut da wir.

2. Pa'z oa deut kreisteiz e oamp faezh ha skuizh,
 Rak an hent 'oa serzhag an heol 'oa kriz,
 Hag e kanemp start, hag e kanemp gwell
 D'hon hufvreoù kaer a oa tec'het pell.

.....

(Roparz Hemon, war un ton skosat)

BALE JULUAN KADOUDAL

E kambr va zad e oan kous - ket, Me n'am boa soñj a
 dra e - bet. E kambr va zad e oan kous - ket, Me n'am boa
 soñj a dra e - bet, M'em boa e - nor he pli-ja - dur,
 Met allae! bre - mañ n'em eus ket mui, Kol - let em eus
 Va eü - rusted, M'he- c'hlaek e pep lec'h ha me ne c'havan ket.

2. Deut eno tri pe bevar sugard,
Int am stlej en ari ar stag.
 3. D'ar prizon ec'h on konduet
'Tre daou jandarm ec'h on kaset.
 4. Er prizon pen on antreet,
En ur besfoz ec'h on taolet.
-

BANNIELOU LAMBAOL

sop
 Me 'meus bet pli-ja - dur E Lam-baol e - we --choù Oc'h o-bar tro
 an i - liz gant an holl ban - nie-loù, Jo po po po lan di bi di bi,
 Jo po po po lan di bi do Man tur la ri don de nig,
 Jo pi rei pi ral - la.

2. Hag o stouñf ganto dirak an aoter vras
Hag ouzh o sevel kerzent, er vann, ken dres all c'hozh.
3. Plijadur am beze pa veze ar pardon,
Oc'h ober tro ar vered gant an dud a galon.
4. Eno 'veze gwalet, pa groge an aval,
Piv 'oa ar baotred wellañ da zougen ar banniel.
5. Ha dre ma tremened a bep tu d'ar vali,
Gant o zeod flour ar merc'hed a roe o ali.
6. Hag a ree o dibab e-touez ar baotred vras
A welent, en o c'haerañ, o tremen dirazo.

o

(Destumet gant H. Gwilherm)

KENDALC' HOMP

E - mañ Breizh b se - vel Dre nerzh he bugale , Ne
 fell ket dimp mervel Di-fennomp hon e - ne, War -
 sav! Paotred Ar - vor ! Breudeur ha mi - goned ! War - sav !
 E - nor d'ar Vre - to - ned !

2. O Breizh, o bro garet, Douar hon Tadoù Kozh,
 O eskern saer a gouek e yenijenn an noz,
 D'ar re a zo marv evit difenn ar vro,
 Atev ! feal ni a chomo !
3. Hor bro garet 'garomp, he brudañ a fell deomp,
 Dre hon labour e vo enoret tro-war-dro,
 O ni a gar hor bro ! Atev ni a garo !
 Atev ! Betek eur hor marv !

o

son gant P. Monjarret

A R G A L V

Deus ganimp war an hent bras, Deus ganimp en a - vel c'hlan, D'en
 sod pe c'hoazh d'ar me-nez Kias, Da heñl to - niou drant hor c'han.
 Ar bi -ni-ou a son flour, Hag e tas-son en hor c'hreiz,
 Hag e tregern 'us d'an dour, Skiltr ha lizhin dreist an tour.

2. Bleun al lann hag ar spenn-gwenn
 Frondoù c'hwek ar c'hoadoù pin
 Dremm arc'hant ar mor hag al lann
 Deoc'h-c'hwi holl, mont a fell din !
3. Keneil ha ne glevet ket
 Galv ar c'hlasvez war ar maez ?
 Ar ruzder-beure a'n em led
 Sevel 'ra an heol d'al laaz !
4. Kouer paour, en de di-soul,
 Hon degemer ouzh da dan,
 C'hwi pesketaerien war an houl,
 Laouenit ouzh hor c'han !

o

(Son savet gant Kerlann war un ton skosat)

NOUËL PLOUEG-AR-MOR

Gorrek

Mabig Je- zuz a zo ga - net, En ur c'hraou noz an Nede-

leg. Gloar da Ve - ri, gwerc'hez fi - del, Pried eo

d'er Spe - red San - t'el.

2. Ur staradenn gaer ha brilliant
Aparisas en Driant
Evit anoñs d'ar bastored
E oa ganet Salver ar Bed.

3. Partiañ 'reas an tri roue
En ur ouelañ dre garantez
Evit anoñs 'oa Roue ar gloar
Deut evidomp war an douar

.....

(Kanet e 1953 gant Janed Kolin
eus Ploueg-ar-Mor)

E - KREIZ AN NOZ

E - kreiz an noz, E - dont o va - le, E truilhoù paour, en e - vel

yen, A zor da zor, hep ka-out an - tra, Ar vaouez doan-ist hag an den, Ar Mez

c'hlan a oa douge-rez War Je-zuz-Krist, ar Rou- e bras, An Den dinamm ar mab a

en - kreiz, A dle-e mer- vel war ar Groez.

2. E-kreiz ho fest Nedeleg pagan,
Gwalc'het ho kof, kristenien fall,
E-biou d'an noz, ez a, diehan,
Troid noazh ha lent, evel gwechall.
Met c'hwi, tud kriz, outo 'zo bouzar,
'N ho tiez tomm ha serret-kloz.
O vale c'hoazh emaint war an douar,
Jozeb ha Mari, dre an noz.


o o

(Savet gant R. Hemon war un ton pobl eus Iwerzhon hag ar Stadoù Unanet)


NOZVEZH SIOUL, NOZVEZH KAER



Noz - vevh sioul, Noz - vevh kaer, Trouz e- bet dre an aer.



A- ze 'barzh ul lo-chenn - ig paour, Ur bu-gel - ig kousk - et flour,



Ur bu - gel - ig gwan - -, Ur - bu - gel - ig gwan.


2. Met a-bell, klevit-hu,
Kan a sav en noz du,
Kan an aelez en Nefvoù don.
O na laouen ha kreffv e son !
Keloù mat d'an dud ! (2 w.)

3. Mabig koant, mabig gwenn,
Te, a gousk war ar foenn,
Mabig bihan ha tost en noezh,
Bennozh dit ha bennozh c'hoazh,
Salver bras ar bed ! (2 w.)


o o o

(Savet gant R. Hemon war an ton alaman anevezet-mat : "Stille Nacht, heilige Nacht...")


AR C'HRAOU NEDELEG




Da Ne-de-leg gant o mamm, Pa-var a vu - ga - le, 'Barzh an iliz



ouzh ar C'hraou, Laouen-holl a sell-e. Met o we-lout reuz ha doan



An ti- e- gezh san-tel, Setu sou-den, en o c'hreiz Anken vras o



se - vel.

2. "Me a gaso", eme Soaz,
Laezh ha bleud d'ar Werc'hez,
Hag ur bezhenn vraz amann,
Evit ober krampouezh."
- "Reif a rin da Jezuz kaezh
Un tren," eme Jakou,
"Ur volotenn, hag ouzhpenn,
Gwestell ha madigoù."

3. "Me a breno," eme Baol,
"Vit a zerc'hel dihun,
Da Sant Jozeb ur c'horn-pri,
Hag ur pakad butun."
- "Me a roio melchon c'hwek,"
Eme Chan, "d'an ejen,
Ha d'an azen un tamm sukr,
Hag ur garotezenn."

.....

(Savet gant R. Hemon war un ton saoz : "Good King Wenceslas.")

KLEIER NEDELEG

O klevit er son a sav en noz du : Bim baon! Bim baon!

Kleier pe - tra a lav - a - rit - hu ?- Ni 'gas ar c'he-loù mat a pep

tu. Al - le - u - ia ! Al - le - u - ia! Meu-leudi da Je -zuz ha

Ma -ri - a !

- | | |
|--|---|
| <p>2. Nedeleg zo deut, zo deut ur wech c'hoazh,
Bim baon ! Bim baon !
Setu ar c'heloù hon eus da gas.
O bezit laouen, bihan ha bres !
Alleluia ! Alleluia !...</p> | <p>4. An aelez a gan, an avel a sut.
Bim baon ! Bim baon !
Hini ac'hanoc'h na chomet mut,
O kanit ivez, kanit, o tud !
Alleluia ! Alleluia !...</p> |
| <p>3. Ur c'heloù a beoc'h a gasomp d'er bed,
Bim baon ! Bim baon !
Lezit ho sourei evit er pred.
Ar joe, dre-holl, a sked hag a red.
Alleluia ! Alleluia !...</p> | <p>5. En douar a-bezh, levenez a zo.
Bim baon ! Bim baon !
Setu Nedeleg o tont en-dro !
Bolontez vat ha peoc'h e pep bro !
Alleluia ! Alleluia !...</p> |

(Savet gant R. Hemon wez un ton elamen eus ar 17-vet kantved)

MARIJANIG LAGADBRAN

Ma - ri - ja - nig La - gad-bran O Ma - ri - ja - nig, Va filho re-zig !

Ma - ri - ja - nig La - gad-bran, A vez a - tav e - tal an tan

Diska:

Tan, tan, tan, Da domm-af da Va - ri - ja - nig, Tan, tan, tan,

Da domm-af da Va - ri - jan !

- | | |
|---|---|
| <p>2. Pa vez exc'h ha skoarn kalet,
E vez atav war an oaled.</p> | <p>3. Pa vez glav hag amzer zu,
E vez atav 'tousez al ludu.</p> |
| <p>4. Pa vez ruz he daoulagad,
E lavar d'he mamm ha d'he zad :</p> <p>.....</p> | |

(Paotr Treoure, war un ton kozh)

KOTOGOTOGOG

Di - sul me 'vo pin - vi - dik, Di - sul me 'vo pin-vi - dik, Pa'm
 bo pre - net ur ya - rig, Pa'm bo pre-net ur ya - rig,
 Greg, greg greg e-me va yar, Koto-goto-gog e - me'r c'hilhog.

2. Disul, me' vo pinvidik,
 Pa'm bo prenet ur c'hilg
 Aou aou aou, eme va c'hi,
 Greg greg greg, eme ar yar...
 3. Disul, me' vo pinvidik,
 Pa'm bo prenet ur marc'hig,
 Quin, c'hin c'hin c'hin, eme va marc'h...
 4. Disul, me' vo pinvidik,
 Pa'm bo prenet ur c'hazhig,
 Biemigneon, eme va c'hazh...
-

(dastumet gant Paotr Treoure)

YANNIG AN DIFOUPER NEIZHIOU

Ka-vet'c'h eus da saout 'ta Yannig, Ka-vet'c'h eus da saout' ta ?
 N'em eus ket, n'em eus ket. Gwalloc'h 'geto 'm eus kavet, N'em eus ket,
 n'em eus ket, Gwalloc'h 'ge-to 'm eus ka-vet.

2. Petra 'c'h eus kavet 'ta Yannig,
 Petra 'c'h eus kavet 'ta ?
 - Un neizh pig, un neizh bran,
 Hag un neizhig laouenan.
 3. Peseurt viod 'zo 'ta, Yannig,
 Peseurt viod 'zo 'ta ?
 - Unan ruz, unan gwann,
 Unan glas, unan melen.
-

(Dastumet gant Paotr Treoure)

VA C'HI HA VA C'HAZH

Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig bra - v, Hag ur c'hazhig brav, Unan
 'fich e lost, un all a lip e bav, Me'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig brav.

2. Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig flour,
 Hag ur c'hazhig flour.
 Unan a ev laezh, un all n'ev nemet dour.
 Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig flour.
3. Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig dous,
 Hag ur c'hazhig dous.
 Unan a zo fur, egile a ra trouz,
 Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig dous.
4. Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig mat,
 Hag ur c'hazhig mat,
 Joe va c'halon ha va daoulaged,
 Me 'm eus ur c'hi hag ur c'hazhig mat.

(Komzoù gant G. Mevel war sonerezh A. Bouchez)

SON AR YAR

Aet eo ma ya - rig er we- zenn, Tam touderi-ti
 tam tou de ri ri ti ta, tra la la! Aet eo ma
 ya - rig er we - zenn, Pe - naos rin-me de- zhi dis-kenn ?

2. Skeif bruzhun bara 'barzh an ti,
 Larout d'ar yar : piti ! piti !
3. Preparaet eo an oustilhoù
 Da lakaat ar yar d'ar marv.
4. Ar yar pa glevas he setañs
 'Zo aet er-maez gant dilijañs.

.....

T O U T O U I G !

Dieken Koublad

Tou-tou - ig la la va ma-big, Tou tou - ig la la. Da
vamm a zo a - mañ, koantig, Ouzh da lus-kel - lat mi - gnonig.
Tou-tou-ig ia la la va ma - big, Tou-tou-ig la - la !

2. Da vamm a zo amañ, oanig,
Dit-te, o kanañ he sonig.
3. En deiz all e ouele kalzik,
Ha hiziv e c'hoarzh, da vammig.
4. Toutouig la la, 'ta peourig,
Poent eo serrif da lagadig,
.....

K A O U R I N T I N H A M A R I V O N I G

P'lec'h 'zay ar saout warc'hoazh Marivonig, P'lec'h 'zay ar saout war-
c'hoazh ? Da bark ar reier glas Kaourintin, Da bark ar reier
glas. O! Ka - sit-i ha deuit en-dro, ha ni a c'hoari-o Marivonig, Ha
ni a c'hoari- o.

2. Peseurt c'hoari a vo, Marivonig,
Peseurt c'hoari a vo ?
C'hoari bouloù derv, Kaourintin,
C'hoari bouloù derv.
.....

AR C'HAZH ROUS

Me'm eus ur c'hazhig bi-han rous, Kan dige-di-ne, Virjen e var-jen ko-
 kar-net a vi, gwi-gou-ret a ra ? Me 'm eus ur c'hazhig bihan rous,
 Ha ne ra ket ne - meur a drouz.

- 2. Me 'raio gant e zaoulagad
Ul lunedoù da berson Prad.
- 3. Me 'raio ivez gant e gein
Ur c'harr bras da charreat mein.
- 4. Me 'raio gant e vouzelloù
Un coullad mat a rubanoù.
- 5. Me 'raio gant e dreid a-dreñv
Ur skeul hir da bignat en nefv.
- 6. Me 'raio gant e dreid e-rack
Ur vazh-yod hag ur vaz-ribod.
- 7. Me 'raio ivez gant e ganc'hen
Ur boned tomm evit va fenn.
- 8. Me 'raio ivez gant e deod
Ur falzig da droc'hañ ar geot.
- 9. Me 'raio ivez gant e gof
Ur c'hased da voueta moc'h.
- 10. Me 'raio gant e ziskouarn
Ur billig hag ur pod-houarn.
- 11. Me a raio c'hoazh gant e lost
Ur skubelenn da fouetañ tost.

(Daetumet gant Fafich An Uhel. Sonioù I.)

KLEIERIGOÙ


Gant va marc'hig ruz, Sta-get ouzh ar c'harr, Savet abred-mat,
 'Maomp o vont d'ar foar. Kleierigoù kouevr, Gwrist ouzh ar brid, A-
 Diskan
 hed an hent a dint, a dint, Hag hor c'halon a drid. Kleier-igoù, kleier-igoù
 Sonit, sonit gae ! Ni hon daou'zo'vont d'ar foar va dousig koant ha me -
 Kleier-igoù, kleierigoù, Sonit, sonit drant ! Ni d'ar foar, me ha hon daou'zo'vont va dousig ko

- 2. Daoust d'an amzer du,
Dacust d'an avel yen,
N'hon eus chal ebet.
C'hoarzhin ne reomp ken
Trotal 'ra ar jav
Skuizhañ ne ra ket.
Eval e vestr, al loenig mat
A gav brav ar bed.
- 3. Teñval eo an oabl,
Bremañ 'raio glav.
Ne reomp forzh ebet,
C'hoarzhin 'reomp atav.
Hag ur vallin gozh,
Eus he skoaz d'am skoaz
A ra, e feiz, a-us d'hor penn
Eval bolz an nefv glas.

o o o

(Aczet gant R. Hemon diwar ar ganaouenn saoz : "Jingle Bells".)

AN TABOULINER BIHAN



Pa zi-bun ar re-ji-mant, E kêr, a-hed ar straed, An



ta-bou-lin-er bi-han A gerzh a-raok be-pred.

Diskan Ram plam plam ram plam plam
Ram plam plam plam he ram plam plam
Ram plam plam ram plam plam
Ram plam plam plam.

2. Re all a soñj, glac'haret,
En dud a chom er gêr,
An tabouliner bihan
A zo dibreder-kaer.

4. Re all a gren, o krediñ
E kouezhint deiz pe zeiz.
An tabouliner bihan
Atav vez leun a feiz.

3. Re all a glask enorioù,
Re all a skuilh o gwad.
An tabouliner bihan
A gerzh a-raok dalc'hmat.

5. Mar rank un devezh kouezhañ
E vo hep loarc'h na klemm.
Estonet-bras, e varvo
Ur mousc'hoarzh war e zremm.


o o o

(Savet gant R. Hemon war un ton aleman)

MAMMIG AR C'HIZHIER



Ur vaouez kozh a oa gwechall, Hec'h anv oa Ma-ri. Hag e oa bepred, a-



hed ar bioez, A gizhier leun he zi. E oa be-pred A gizhier leun he zi.

2. An ti oa karget traon ha krec'h
A gizhier e pep kogn.
Lod oa naet ha koant, ha lod oa vil,
Ha debret gant ar rogn.
Ha lod oa vil,
Ha debret gant ar rogn.

3. Ha lod oa du, ha lod 'gwenn,
Ha lod oa melen-rous.
Hag etrezo holl, pa veze kann,
En ti-se nag a drouz !
Pa veze kann,
En ti-se nag a drouz !

.....
(Savet gant R. Hemon)

ME'M EUS UR C'HAZHIG

Me'm eus ur c'hazhig, ur c'hazhig rous, N'eus koant-oc'h kazh - ig
 'barzh ar bed, Ar c'hazh-ig 'ra : mia - ou.

2. Me'm eus ur c'hiig du,
N'eus koantoc'h kiig 'barzh ar bed.
Ar c'hiig 'ra : wao, wao.
Ar c'hazhig 'ra : miaou, miaou.
3. Me'm eus ur yarig, ur yarig ruz,
N'eus koantoc'h yarig 'barzh ar bed.
Ar yarig 'ra : kot, kot...
Ar c'hazhig 'ra : miaou, miaou...
4. Me'm eus un houed glas,
N'eus koantoc'h houed 'barzh ar bed.
An houed 'ra : kwak, kwak...
5. Me'm eus un danvad, un danvad gwenn,
N'eus koantoc'h danvad 'barzh ar bed.
An danvad 'ra : be, be...

6. Me'm eus ur vuoc'hig, ur vuoc'hig vrizh
N'eus koantoc'h buoc'hig 'barzh ar bed.
Ar vuoc'hig 'ra : meu, meu...
7. Me'm eus ur marc'hig, ur marc'hig gell,
N'eus koantoc'h marc'hig 'barzh ar bed.
Ar marc'hig 'ra : hin, hin....
8. Me'm eus un azen, un azen gris,
N'eus koantoc'h azen 'barzh ar bed.
An azen 'ra : han, han...

Evit echuif :

'Maint holl o c'hoari 'barzh ar porzh,
O c'hoari hag o choual forzh :
Miaou, miaou; wao, wao,
Kot, kot; kwak, kwak;
Ba, be; meu, meu;
Hin, hin; han, han;
'Maint holl o choual forzh.

(Savet gant R. Hamon war un ton-pobl eus ar Stadou-Unanet)

LOEIZAIG HA PERIG

Perig - U - zet em eus va bou-toù, ha toullet va loe-roù, He toullet
 va loe-roù, O vont d'ho heul pannaherez, Ge ge ge fin la din de nik,
 O vont d'ho heul pannaherez, A glas-kan da ves - trez.

Loeizaig, pa 'z in-me d'ho ti,
D'ho klask da zimeziñ,
Roit din ur respont vat,
Ge ge ge fin la din de nik,
Roit din ur respont vat,
Eval ho mamm d'ho tad.

LOEIZAIG

Respont a rin, den yaouank,
D'ur goulenn 'zo ker koant
Ne livirin gaou ebet,
Ge ge ge fin la din de nik,
Ne livirin gaou ebet,
Dimeurzh 'vin euredet.

Dimeurzh e vin euredet
Diwezhat oc'h deust
Rak un all en deus hadet
Ge ge ge fin la din de nik,
Rak un all en deus hadet
Em liorz ar bleuv eured.

PERIG

Hadet ganin e cant bet,
C'hwil hoc'h eus o zennet,
Bremañ p'o gwelan gwenvat
Ge ge ge fin la din de nik,
Bremañ p'o gwelan gwenvat
Va c'halon 'zo rannet.

o o

PIERIG HA FRANSOEZIG

Tos-tait a - mañ war benñ ma glin, Fransoezig, ma Fran - soe-zig !

Tos - tait a - mañ war penn va glin, Da gaozeal ha da c'hoarzhin.

2. En ho kichen, me 'azeo,
Pierig, me Fierig,
En ho kichen, me 'azeo,
Hag ac'hane ni 'gaozeo.
3. Ma dous Fransoez, din e larfet,
Petra 'ra deoc'h ne zime't ket.
4. Pezh a ra din ne zime'an ket,
Aon am eus rak gwall bried.
5. Mæz 'c'h eus aon rak gwall bried
Ma c'hemerit ha n'ho po ket.
6. Dre 'm fidemdoulig ha ma feiz
Setu aze ma brasañ le.

.....

(Kanet e 1952 gant Marian Lasbleiz, eus Ploueg-ar-Mor)

S O N H E L E N A

Ar verc'h: Mamm, ma fell deoc'h va di - me - ziañ, 'S ur boulonjer, 'n gomzit ket din.

Ar vamm: Pe - rak e - ta, He - le - na ? Pe - rak e - ta, va merc'h,

Pe - rak e - ta ?

Ar verc'h : Ur boulonjer a foust e doaz,
Hag a c'hell ober din ken gwazh !

Ar vamm : Ya ! re wir eo, Helena,
Ya, re wir eo, va merc'h,
Ya ! re wir eo !

2. Mamm, ma fell deoc'h va dimezif,
Eus ur c'higer, n' gomzit ket din...
Ur c'higer 'vez kriz e galon
Am c'hemerfe e-lec'h ul loen...

3. Mamm, ma fell deoc'h va dimezif,
'S un tavnour, n'gomzit ket din...
Un tavnour a rafe din
Chom hep ehan e stal ar gwin...

.....

(Lakaat komzoù ar vamm, ar "Perak eta Helena" hag ar "Ya ! re wir eo Helena", bep eil, war-lerc'h koubladoù ar verc'h evel m'int lakaet war-lerc'h ar c'hentañ hag an eil koublad.)

AR GOULENN-EURED

De - mat, de-mat, roit ho merc'h din, ho! De - mat, demat, roit ho merc'h
 din, ho! De - mat, de - mat, roit ho merc'h din, Ne vo ket mal-eürus/ ga-
 nin, De -mat, de -met, roit ho merc'h din, Ne vo ket mal-eü-rus ga-nin.

2. M 'y ay d'ar park da labourat;
Hi 'jomo 'r gêr da luskellat.
 3. Da luskellat ha d'ober tan,
Da dommañ yod d'an 'ni bihan.
 4. Me vo kontant 'fin ar sizhun,
Ma c'hellan kaout va zamm butun.
 5. Un tamm butun ha dek gwenneg,
C'houlennin ken digant va gwreg.
-

AR VATEZH. VIHAN

An ev - ned a ri - chan, An hecl a zo la - ouen, Kaer-
 at eo ar me - nez gent e vleu-nioù me - len ! O ! Kaer-
 at eo ar me - nez gent e vleu-nioù me - len !

2. Brev eo d'ar mesaer c'hoari war ribl ar wazh,
Ma d'an alc'houeder skeñv darnijal en oabl glas,
 3. Ha din, maezh vihan, kas lein d'ar vederien,
'N ur ganañ, dibreder, a-hed ar wenojenn.
 4. Aze, er souleg vras, 'mañ ma gwellañ mignon,
Ur peotr kreff e zivrec'h ha leal e galon.
-

(Savet gant Koulmig Arvor, Filomena Kadoret)

AN DURZHUNELL

Kalz am-zer am eus kal-let O fur-chal ar c'hoar-doù,
 'Vit sour-pren an dur-zhu-nell Kousket war ar bren - koù.
 Skoa-ziet em eus va fu-zilh, Met ten-net em eus fall. Tec'het eo an
 dur-zhu-nell Ha ni-jet er c'hoar all.

2. Diouzh an noz hag ar mintin
 'Kleven al laboused
 O kanañ, o fredoniñ,
 Da veg ar gwez pignet.
 Ha n'eus nikun anezho
 A bikfe va c'halon
 Evel mouezh an durzhunell
 O ouelañ d'he mignon.

(Destumet gant Peotr Treourea)

WAR BONT AN NAONEO

P'e - don war bont an Nao-ned, di-ge - don lan li - za, P'e - don war bont an
 Nao-ned, di-ge - don lon la En deiz all o ka - nañ, di-ge
 don lan li - ra, En deiz all o ka - nañ dige-don lon la

2. Me gwelet ur plac'h yaouank
 Lez ar ster o ouelañ.
3. Ha me o c'houlenn outi :
 Na perak e ouelañ ?
4. Va gwelenn acour, emezi,
 Er mor a zo kouezhet.

.....

(dastumet gant A. Gwilhezm)

ME A SAVO UN DOURELL

Me a sa-vo un dou - rell war vordig ar mor don, War
 ar mor don, war ar mor don, o ! Ar mor glas a-lacou-ret ! Hag ac'ha-no
 e we - lin dou-re - ou va mi - gnon.

2. Ha me a welo du-hont ul lestr bras o tonet,
 War ar mor don, war ar mor don, o !
 Ar mor glas alaouret !
 Ha hennezh a zegaso va dous muiañ-karet.
3. Va c'hemer 'rsio neuze da vont gantañ da bell,
 War ar mor don, war ar mor don, o !
 Ar mor glas alaouret !
 War e lestr e ouelioù gwenn dispaket d'an avel.
4. Hag en avel 'luskello hor red dianavez,
 War ar mor don, war ar mor don, o !
 Ar mor glas alaouret !
 Etrezsk an inizi, er mor a garentez.

(Savet gant Maodez Glanndour war un ton eus Bro-Wened)

AN TEIR SEIZENN

Bet zo bet un am-zer, Un am-zer dre - me - net, Un
 am - zer dre - me - net, E ka - ren o ka - rout hag a ve-zen ka-
 ret la-ti-ra, E ka-ren o ka - rout, Hag e ve-zen ka - ret.

2. Bremañ 'z eus un amzer, un amzer kontrol din,
 Ne ran joa ouzh hini, hini ne ra cuzhin.
3. Bout 'zo bet un amzer, e tougen teir seizenn :
 Unan ruz, unan glas, an arall a oa gwenn.
4. An hini ruz 'laken en enor d'ar madoù,
 An hini glas 'laken en enor d'ar bizoù.
5. An hini glas 'laken en enor d'ar bizoù;
 An hini gwenn 'laken etrezomp-ni hon daou.

(Destumet gant Loeiz Herrieu ha Duhamel)

TUCHANT EC'H ERRUD AN HAÑV

Tu -chant ec'h er-zu - o an hafv, Tu-chant ec'h er-zu - o an hafv, Tu-
 chant ec'h er-zu - o an hafv, Hag e kan-o er bo - be - lan, Hag e kan-
 o ar bo - be - lan.

2. Ar bobelan hag an eostig,
Ar voualc'h argant, an houperig.
 3. E kano ar goailh, er Pradoù
E tigor ar bokedoù.
 4. E tigor ar bokedoù,
Hag e vo graet aliañsoù.
-

SETU ECHU AR GOAÑV

Se-tu o - ctu ar go- añv! Me wel ar bok- e- doù hafv O visun-
 iañ a - hed er c'hleuzioù. Tra la la le no, la la la la la la !
 An holl la-bous-ed bi - han Hag an durzhunell e gan War ar gwez e-
 kreiz er c'hoadoù ! Tra la la le no, la la la la la ne-no. La la la la la !

2. C'hwez vat a zo er spenn gwenn,
Kaer eo ar bleunioù melen
El lenneier hag er Pradoù
Tra la la leno, la la la la la la,
Evnedigoù Breizh-Izel
A zigor o divaskell
Da nijal e-maez o neizhoù.
Tra la la leno la la la la leno
La la la la la la !
-

(fon ha son gant Yann Derrien)

LUSKELLEREZH

En ho ke-vell - Kouskit yac'h - O - ro - zenn a
 blac'h ! An - mefiv - da reif deoc'h Le- ve - nez ha peoc'h ! Kouskit
 flour, kouskit c'hwek,
 C'hoarzh un ael war ho peg - ! Kouskit flour, kouskit
 c'hwek, C'hoarzh un ael war ho peg !

2. Dre ho hufvra, nijit skafv,
 O rozenn an hafv !
 D'ar vro ma n'eus bec'h,
 Nag anken neblec'h.
 Kouskit sioul, kouskit kloz, } 2 wech
 Aelig dous, 'hed an noz !

o o o

(Savet gant R. Hemon war ur c'han azoet gant Brahms : "Guten Abend...")

AR GOAÑV A ZO TREMENET

Ar goañv a zo tre - men - et, Deut eo an am-zer vraz. An
 eostig en deus kan- et, En noz er bodig skav. A - bred ez an
 er saon-enn, Va c'halon start ha drant, Da gan-af ur gan-
 a - ouenn, E- vit va dous-ig koant.

2. Va dousig, o va dousig,
 Me 'zo dirsk ho ti.
 Digorit ho prenestrig,
 Diskouezit din ho fri.
 Kent tarzh an deiz on savet
 Hag aet dre c'hlizh an noz,
 Da ober deoc'h ur boked
 A lili hag a roz.

3. Pell amzer em eus kanet
 Ne respont ket ur gar.
 He dor a zo morailhet
 He stalef a zo serr.
 Ha trumm me 'ghev ar goukoug,
 O krial din, me 'gred:
 O krial leizh he gouzoug :
 "Hec'h-unan n'emaf ket."

4. Ar goañv a zo tremenet, Ne vezimp ket dimezet,
 Adeo, va dous, adeo. Ne chomin ket er vro,
 Va c'halon oa dudiet, Ne zougin ket ar boned,
 Ha bremañ rannet Va dousig, kenavo !

o

(Savet war ur gansouenn gozh aleman gant R. Hemon : "Der Winter ist vergangen".)

J A N I

Me 'sofj e Jani gant he blev melen-our, 'Vel ur gurunenn
 war he zalig flour, M'he gwel dre'm c'hoazh o mistr ha skafv, skedus en he
 envor tont
 c'he-ned 'vel ar bleufv eus En ur ganañ gaegant he mouezhig skiltr ha sklaer,
 an hafv,
 Sklintin 'vel ur c'hloc'hig tin-tal dre'n aer. Me 'sofj e Jani gant he
 blev me-len our, 'Rae'vel ur gurunenn war he za - lig flour.

2. Dre'm effvor, Jani c'hoazh a zeu war va zro,
 'Vel pa liviris dezhi kenavo,
 He dremmig o vouc'hoorzhin din, sioul ha lent,
 Me, va c'halon vantret, o pellaat gant an hent.
 Derc'hel war va daeroù a rean-me, koulz ha hi,
 Hag e ouiemp mat n'en em weljemp ket mui.
 Dre'm effvor, Jani c'hoazh a zeu war va zro,
 'Vel pa laveris dezhi kenavo.

3. Ar bed hep Jani a zo din trist ha yen.
 Hi eo a c'hellen karout, hi hepken.
 Va c'halon deiz ha noz a glemm hag a lefiv,
 Hi oa war an douar-mañ va lod eus an nefv.
 Ha netra met skeud va faradoz aet da goll
 N'eo evidon kened ha sked ar bed-holl,

(Savet gant R. Hemon war don "I dream of Jeanie", gant Stephen C. Foster)

YANNIG AR MIL MICHER

Me eo Yan-nig ar mil mi-cher, Me eo Yan-nig ar mil mi-cher,
 A - na - vet mat gant ar vi-zer, Hop ! Hei ! Tra la la la,
 la la la la, la la la la, la la la la la la.

2. Brudet dre-holl war an douar,
 Biskoazh n'em eus kavet ma far.
 3. Ur vestrez koant am eus choazet,
 Mont a ran 'lies d'he gwelet.

AR C'HI EN DIENN

Di -sul o tont eus an o-fern, Di-sul o tont eus an o-fern, 'sailh ar c'hi
du, lan-di-ge-don, Er pod di-enn, lan li-ron.

2. Erru ar mestr e-kreiz an ti,
Hag e c'houlenn, landigedon,
P'lec'h 'mañ e gi, lanliron.
3. Ar mestr a lar d'ar vesaerez :
- Krog en e lost, landigedon,
Tenn-efi ez-maez, lanliron.

.....

(dastumet gant an Ao. H. Gwilherm)

SON AR C'HAFE

A Gas-tell Paol da La-nu-on, A Ger-nev da Ouelou, ez eus bet savet
meur a son, Di-war an e-va-joù. E-vi-don keit ha ma ve-vin, Me'gav din
Diskan
e la-rin : Ne-tra ne blij din-me 'vel ur banne ka-fe, Ne-tra ne
blij din-me 'Vel ur banne ka-fe !

2. Ur vamm pa glev he bugel kaezh
O ouelañ 'n e gavell,
Gant un dakennig kafe laezh
A ra dezhañ taval.
Ha neuze div vouezhig vihan
A-unan a vouskan :
Netra ne blij gin-me
'Vel ur banne kafe !

.....

(Evnig Penn-Ar-C'hoad)

S O U B E N N A R Y A R

Sou-benn ar yar ne deo ket fall, Ta la ri ti tan, ta la
ri ti ta la la la ra la le ! Sou-benn ar yar ne deo ket
fall, Pa vez en-ni un tamm kig sell !

- 2. Mez plij ganeoc'h e selaoufet,
Ur son 'zo nevez gompozet.
 - 3. Ar sul kentañ a viz genver,
Ec'h eas ar yar er-maez ar gêr.
 - 4. Ha da di Wegan da vale,
Biskoazh gwashoc'h tra na eure.
-

S O N I G A R C ' H A V R

Di - dos-tait, kozh ha yaouank, da glevout ur se - tafs. Deut da glevout
son ar c'havr, mont a ran d'he c'homafs.

- 2. Hec'h amann a zo ken kaer hag he laezh 'zo ivez,
Ma c'honezan diouzh va gevtr triwec'h diner bemdez.
 - 3. Met ma gevtr a oa ken laer hag ivez ken friant
Ma oa lampet en deiz all e liozh en Nozmand.
-

AN ANDUILHENN

'n Actrou Per-son en deus c'heantast un anduilhenn bet er mo - ged. (div wech)

Diskan

Hop hop hop n'eo ket gwir an dra-se, O yeo da gwir'walc'h e oa ! (div wech)

2. Kaset ar vatezh prontamant
Da c'houlenn anduilh 'vit argent.
3. Pa oa poazhet ha poazhet-mat,
.E voe degaset war ur plad.
4. Pa voe rannet dre an hanter
Ne bade den gant ar c'hwez flaer.

.....

(destumet e Pleiben gant Narsis Kellien)

SON AR PILHAOUER

Ma-ri - von-ig 'zo di- me-zet gant ur c'hozh tamm pilha -ouer, Gant ur

c'hozh tamm pilha- ouer, E Lok - e -fret ez so gan-et e Kou-me-nant Toull al

Diskan

Laer. Foei foei foei Va zammig Ao - trou gant e stoub hag e bilhoù.

2. Antronoz dezvezh an eured,
E oa foar e Landerne,
Ha va lapous, prim dihonet
Sav er-maez eus e wgle.

3. Dreilhañ 'ra un hanter pater
Tanañ 'ra e gozn-butun,
Hag en hent, gant e grogpouezer
Da bouzmen 'hed ar sizhun.

.....

(Savet gant an Ao. Bodeur, person e Lokafred, war-dro 1870)

ME 'GAR FILO

Me 'zo ur paotr a fe-son vat, 'Zo debret gant ur ga-lon-ad, Me
 'gar ur plac'h anvet Fi - lo, Spont- u -sañ paotrez 'zo er vro. Dre ar
 bar -rez hag ar c'hanton, Meur a blac'h a gar ac'ha - non. Me'zo sur em
 eus o c'ha-lon. Si - wazh, me 'gar Fi - lo !

2. Me zo mounoun Merivona.
 Me 'gred e plijan da Dina.
 Ha Katarin din a roio
 He dorn, pa garin, hag afo.
 *arivona a zo koantik,
 Tina vihan a zo un aelig,
 Katarin a zo pinvidik,
 Siwazh, me 'gar Filo !

.....

(Savet gant R. Hemon war ur ganaouenn-bobl amerikan :
 "So early in the morning".)

JULIG AR VERVERO

Me 'ga - ve din, gwech di-me-zet Ju - lig ar ver - ve - ro,
 N'em bi-je graet, ne -tra e- bet, Ju-li-ver-ton- ti, Ju -li-ver-ton-
 ton, Ju - lig ar Ver- ve - ro, Daou- la - gad
 ar c'hwil-de - ro !

2. Padal e rankan ober tout,
 Aozañ krampouezh ha fritañ yod.
3. Ar pezh a gavan gwashoc'h c'hoazh,
 Eo pilot lann gant va zreid noazh.
4. Dimezet on d'un evez gwîn
 A ya d'an davarn bep mintin.
5. Ar gwîn a ev leizh e wezenn
 N'eo ket gwîn ruz, met gwîn melen.

.....

A N H A D E R

Pa strinkan had a- ver-nidu War zou-ar an Ar-vor, A-
gleiz me 'wel me - ne -ziou, A- ze-hou me 'wel ar mor.

2. Er bloaz a zeu 'vo bara
'Vit holl dud ar c'hontre,
Ha greun e-leizh da vagañ (2 w.)
Holl laboused an Nefv.
3. Va c'hwezenn a zuilh fonnus
Dindan an avel yen;
Na pebezh glizh burzhudus (2 w.)
Da drempañ va zachenn.

o

(Dastumet gant Bourgault-Ducoudray)

AR MILINER DRANT

Jr mestr-mi-li-ner 'tal ar stank, A ve -ve gwe-chall gozh. Ha
kle-vet 've-ze gant an dud o ka -nafi deiz ha noz. Ne
vern pe -tra e oa e son, Un dis-kan ne oa ken : "Da zen e-bet ne
die - an tra, Ha ne ran forzh e zen".

2. "Va milin goant a zo va gwreg,
N'em eus na merc'h na mab.
E-barzh va zi ez on ar mestr,
An dug, ar priñs, ar pab.
Pe'm c'haver fur, pe'm c'haver sot,
Ne ra din tomm na yen.
Da zen ebet ne dlean tra,
Ha ne ran forzh a zen".

o o

(Savet gant R. Hemon war un ton-pobl a Vro-Saoz)

KAN AN DUD A VOR

Ni eo an dud a vor, delc'hmat war an dour luskell, Drant
 e kreiz an a-vel, Start hor c'ha-lon en hor c'hreiz ha
 pa ve mor di-rol-let Ni ya war hor bag, he gouelioù di-
 go-ret 'vel div as-kell.

2. Klavit, emañ mouezhioù ar mor o krozal da c'hervel
 Ar vartoloded kreff
 Da vont afo war an dour, melezour skedus an neff,
 Ha da stourm bepred, o gouelioù stegnet holl ouzh an avel.
3. Gwelit al lanv ledet bras war an aod o c'headal
 Ar re 'drid o c'halon
 Gant levenez, pa welont o pellaat douar tefval
 Hag o bag o vont a-benn-herr war c'horre an tarzchioù don.

(Ton gant H. Gwilhezm ha komzoù gant K. Mevel)

ME ZO GANET E-KREIZ AR MOR

Me 'zo ga-net e-kreiz ar mor Teir lev er-maez Un ti-ig
 gwenn du-ont am eus Ar banal 'gresk e-tal an nor, Hag al lann
 'c'ho-lo an an-vez Me 'zo ga-net e-kreiz ar mor 'E bro Ar - vor.

1. Me' zo ganet e-kreiz ar mor,
 Teir lev er-maez,
 Un tiig gwenn du-hont am eus,
 Ar banal 'gresk e-tal an nor,
 Hag al lann 'c'holo an anvez
 Me 'zo ganet e-kreiz ar mor,
 E bro Arvor.
2. Ma zad a oa 'val e dadoù
 Ur martolod.
 Bevet en deus kuzh ha diglod,
 Ar paour na gan den e glodoù,
 Bemdez-bemnoz war ar mor blot.
 Ma zad a oa 'val e dadoù,
 Stlejour rouadoù.
3. Ma mamm ivez a laboure,
 Ha gwenn he b'lev,
 Ganti ar c'hwez war hon talioù,
 Desket em eus, bihanik tra,
 Medif ha tonnañ avaloù.
 Ma mamm ivez a laboure
 D'c'honit bara.

Sonerezh gant J. Penven, komzoù gant J. P. Calloc'h.

PACTR AR YEODED

'Vel fout ar vartolo- ded, 'M eus ba-le-et er bed. Ar bro-
 ioù tomm 'meus gwelet, Hag ar bro-ioù skornet. Gwe-let'meus'n ur veajiñ
 Bro-ioù kaer ha dispar; Met bro-ioù all 'vel ma hi-ni, N'eus ket war en
 dou- ar ! Me 'zo deus ar Yeo- ded, 'Tal ar cha -pel du-hont,
 En bro ar var-to -lo - ded E beg ri-nier Lan- u - on.

2

Pa oan erru bras 'vel-se,
 'Vel tout ar grennarded
 'Vezan en aod 'hed an deiz
 O c'hoari gant bigorned
 Ha diwezhatoc'h goude
 Ne gaven ket divalo

Mont d'an aod kazi bemdez
 Gant paotred ar bagoù,
 Mont da lakaat kevell
 Pe da lakaat rouedoù
 Pe da voueta un andell
 Da dapout silioù.

.....
 (Savet ton ha son gant Yann Derrien)

LUSKELL, VA BAG

A - dal ar beu-re Be-tak an noz, Peske-ta eo va lod.
 Kuit-aet am eus va ziig kloz Kluchet e-tal an aod.
 Diskan
 Lusk-all va bag war gri-bell an dour, Dis-pak da ouel he red,
 Kas-et war-raok en a -velioù flour, Sent ouzh ar stur be - pred !

2. Arnev oa bet, gleb-teil e oan,
 Kounnaret oa ar mor,
 Se ne ra mann, ret eo kaout poan
 Trec'h omp d'an avel-vor !
3. Bremañ eo brav, seder ez on;
 Gwenn-erc'h e nij ar spoum.
 Beg lemm va bag a skej an donn,
 Kaset omp dreist ar c'houmm.

.....
 (Aozet gant Kerlenn war un ton brudet a Vro-Skos :
 "The Skye Boat Song".)

BAGEERIEIEN AR VOLGA

Sa - chit, ho ! Sa - chit, ho! Kan-it breu- deur! Sa -chit, ho!

Sa - chit, ho ! Sa -chit, ho! Kanit breu - deur! Sa -chit, ho !

Sa-chit ka - lot, paotr-ed kreff! Sachit ka - let war ar roefv !

Put eo an a - vel, Yen eo ar beure, Kanit brou - deur! Sa - chit, ho !

2. Sachit, ho! Sachit, ho !
 Kanit; breudeur ! sachit, ho!
 Sachit, ho ! Sachit, ho !
 Kanit, breudeur ! Sachit, ho !
 Start ho labour, paotred keizh !
 Kanit seder 'hed an deiz !
 Ledan an dourioù, divent ar blaenenn.
 Kanit, breudeur ! Sachit, ho !

3. Sachit, ho ! Sachit ho !
 Kanit, breudeur ! Sachit, ho !
 Sachit, ho ! Sachit, ho !
 Kanit, breudeur ! Sachit, ho !
 Kanit seder, gant an noz,
 C'hoazh e c'hellot kousket kloz,
 Peoc'hus ar gwagoù dindan ar stered.
 Kanit, breudeur ! Sachit, ho !

(Savet gant R. Hemon war un ton rusian anavezet-mat)

MINTIN WAR AR MOR

An te-vennoù bras hag ar c'herreg meur A zo kaer pa sav ar beu-re, Ar

mor a lug-ern hag e skleur an heol war lein ar bre. Ar mor a

lugern hag e skleur An heol war lein ar bre. An te-vennoù bras hag ar

c'herreg meur A zo kaer pa sav ar beu - re.

2. Sell an houlen skaffv hed-ho-hed an traezh,
 O tiruilhañ fresk ha lirzhin.
 A-bell e your'h dimp kreffv ha fraezh :
 "O deus ha striv ganin !"...
3. Stourm a raimp, o mor, gant hor bruched noaz
 Start a vrac'h ha start a galon,
 O tridal hag o tridal c'hoazh
 'N ur c'hoari war an donn...

(Savet gant R. Hemon war un ton a Iwerzhon)

SAV, BREIZH-IZEL

FA SI^{ob} FA DO⁺ FA

Se - tu e - chu an noz, splannaat a ra an deiz, Ar c'hloc'h a dint

DO⁺ FA DO⁺ Diskan

c'hoazh ur wech an A-ve. Sav ! Sav ! Breizh-izel bro hep

par, An heol a strew e splanner war an douar Sav ! Rak

me 'glev kan lirzhin Al la-boused di-hun holl en - dro din.

2. Ar voualc'h er bod sperm a c'hwitell d'ar mintin,
Bugale Vreizh a gouezh war an deoulin.
3. Ar glizh o deus fuilhet perlez dre an douar,
An heol o c'hutuilho diouzh beg ar barr.

(Komzoù J. Ar Bayon; ton gant J.P. Danteg)

FA LA DO
DO MI SOL SI^{ob}
SI^{ob} RE FA
RE FA LA

E - BARZH AR C'HOADOU GLAS

E - barzh ar c'hoadou glas, Da va - le ne daimp ken, An

de - lioù sec'h dre-holl 'Ya gant an a - vel yen. C'hweshit, a - vel

skorn-et, Bez' eus tan en oal - ed; Kan-omp, dansomp! Goude'r e teuy an hafiv!
goafiv

2. E-barzh ar Pradoù gwer,
N'eus ken a vleunioù brav.
Holl ez int aet da guzh,
Spouzonet gant ar glav.
Sellit ar fulennoù,
Bravoc'h 'vit ar bleunioù !
Kanomp, dansomp !
Goude'r goafiv e teuy an hafiv !

3. Ar gwennilied skañv
A nije 'tal en ti,
'Zo aet da glask an heol,
Ha ni n'o c'hlevomp mui.
N'hon eus ket a eskell,
Aman rankomp menel,
Kanomp, dansomp !
Goude'r goafiv e teuy an hafiv !

(Savet gant R. Hemon war un ton gall anavezet : "Nous n'irons plus au bois

AN NEVEZ-AMZER HAG AR GOAÑV

Goañvig kozh kit en ho hent, Ho la hi, ho la ho ! Me'gev din ea tzenen poent
 Ho la hi a ho ! Grit ho pa -kad he skam-pit prim, Ho la hi,
 ho la ho ! Gant ho ri-ell ha gant ho frim ! Ho la hi a ho !

2. Nevez-amzer, me'm eus c'hoant
 Chom geneoc'h, o plac'hig koent !
 Me 'vo fur, ne rin ket a drouz,
 Ho pet truez ouzhin, va dous.

3. Hola ! me n'on ket ho tous !
 C'hwi 'zo kabac'h, treut ha lous !
 Gant an anken ha gant ar riv,
 'Varvfe va holl laboused gwiv !

.....

(Savet gant R. Hemon war un ton alaman : "Horch, was komm von draussen rein".)

AR RAZH-KOAD

Kentañ lodenn
 Di - sul o ve-le dre ar c'hoad, I-ri dei tou lari- de-no, Se-tu ta-pet din
 ur razh-koad, I-tou i -tou i -tre lala la, I - ri dei tou lari-de-no.
Fil lodenn
 Ha setu en koue't marv-mik, Lakaet da za- rev er billig. Laritouri
 tei ge, lari-tou-là la, hop hop hop ! La-kaet da za-rev er bill-ig !

Trede lodenn
 Ha da go-roll pa'n em lakaont, 'vel razhed sailhat'reont, I -tou la lu-
 koad,
 ron, lu-ron la-lu-rig, I - tou la lu -ron lu -ron lal- u - rig.

.....

(Ton ha son gant J. Ar Bayon)

V A Z I B I H A N

A bep tu em cus re-det Da glesk an eurusted, Da glask labour de
 c'hounit va ba - ra, Met d'ar gêr pe zistroan, em c'halon e tanvaen ar bli-
 ja-dur, al le-venez vras-añ, Pa zeu'n a-vel da c'hwezhañ er mor da eonennañ,
 Pa zi-roll an holl drougoù er goañv, O! nag eo du-dius chom er gaudor,
 eñ-zus - En va zi bi-han kar-antez - us. O! me da gar, ti va
 zad-nù, Mui-oc'h e-get an holl defzor- ioù, Karget laouen e sklerijenn! Ti
 kozh, te 'zo 'vel ur ba - ra - doz.

.....
(Paotr Treouze, war un ton a Vro-Gembre)

H I R V O U D O U

Pe - naos oc'h c'hwil ken kaer gwisket, Trao-nienn ha prad leun
 a vluniou, Pe-naos e kan - it, la - bous- ed, 'Tao m'e -maon me o
 skuilh deoloù? Ho kan-a - ouennoù du-di-us Va c'ha - lon baour din
 a rann - o, 'N ur gomz eus an am-zer eù - rus Ha ne zeu-io bi-
 ken en - dro !

2. Da c'houlou-deiz 'vel d'abardaez,
 Me 'garje mont war ribl ar stêr,
 'N ur vouskañ va c'harantez
 'Vel an eostig, an alc'houeder.
 Dindan ar gwez, laouen bepred,
 E kutuilhen bleunioù dispar;
 Siwazh, setu me dilezet,
 Ha rannet holl gant ar glac'har.

o o
(Ton brudet a Vro-Skos)

O TREGAS FALL

O tre-gas fall, Sav prim ha di-loj eus va zi. Kas
 da lec'h all, Ne fell ket din da welout mui. Hir amzer a-mañ
 ez out bet, Me 'gre-de din e vi-jen lazhet. Met tre-gas yen, Gan-
 it-te pa-ket ne vin ken.

2. Ne vein petra
 'C'hoarvezo genin, ne rin forsh.
 Levenez 'ta
 A vezo en ti hag er porzh.
 Va gwreg 'vo sart, ha me 'vo gas,
 O tafeal d'an noz ha d'ar beure.
 Te, tregas du,
 A c'hello dansal war ar zu.

o o

(Savet gant R. Hemon war un ton skosat : "Begone, dull care...")

S E R R - N O Z

Ar c'hloc'h a son 'us d'ar barrouz, Ar c'hoad uhel a zo di-
 drouz. Didrouz ha sioul'vel un i - liz, War an douar e kouezh ar glizh.

2. E-barzh ar park, e-barzh ar prad
 Oer ehanet da labourat;
 Klozet delioù ar bokidi,
 Al laboused aet da gludif.
3. Ha war ar bod a-us d'ar wazh,
 Evnig bihan, c'hwi a gan c'hoazh;
 Evnig bihan, poent eo tevel,
 Gant aon na glevfe ar sparfell.
4. War ar roc'h vras 'man o selaou,
 E lagad lemm-ruz 'vel er glau;
 Evnig bihan, dous ho mouezhig,
 Evnig bihan, it d'ho neizhig.

.....

(Aczet gant Erwann Ar Gall, eus Lokmikael-an-Traezh, Troger)

K E N A V O

Pa ve-zer gant mi-gnon-ed vat, An am-zer a vez berr, A-tav e c'hoarvez
 re a-bred Ar poent da vont d'ar gêr. Ke-na-vo 'ta mi-gnon-ed ker, Mi-
 gnon-ed, ken-a-vo, Kuit-aat a reomp be-tek an deiz Ma teuimp holl en-dro.

- 2. Ne vezn pelec'h e vezimp holl,
 O kantren war ar bed,
 An nefv da reiñ dimp yec'hed mat
 Ha kalon vat bepred.
- 3. Ha bremañ touomp, dozn ouzh dozn,
 Da viken derc'hel kloz,
 En amzer vraz, en amzer fall
 D'han holl vignoned kozh.

o o o o

(Savet gant R. Hemon war un ton skosat anavezet : "Auld Lang Syne")

T A O L E N N .

RASERID, gant MAOZEL GLANNDOUR

Niv. Paj.

KANAOUENNOU BROADEL.

- 1. Bro Gozh Va Zadoù.
- 2. Kan-Bale Arzhur.
- 3. Kan-Bale Nevenoe.
- 4. An Alarc'h.
- 5. Swir Vretoned.
- 6. Dalc'h Sofij.
- 7. An Huñvreoù Kaer.

KANOU-BALE.

- 8. Bale Juluan Kadoudal.
- 9. Bannieloù Lambaol.
- 10. Kendalc'homp.
- 11. Ar Galv.

NOUELOU.

- 12. Nouel Ploueg-ar-Mor.
- 13. Nozvezh Sioul, Nozvezh Kaer.

EKIT AR VUGALE.

- 14. E-kreiz an Noz.
- 15. Ar C'hraou Nedeleg.
- 16. Kleier Nedeleg.
- 17. Marijanig Lagadbran.
- 18. Kotogotogog.
- 19. Yannig an Difouper Neizh.
- 20. Va C'hi ha va C'hazh.
- 21. Son Ar Yer.
- 22. Toutouig.
- 23. Kaourintinig ha Mariv.
- 24. Ar C'hazh Rous.
- 25. Glav 'ra Berjerenn.
- 26. Breurig Jakez.
- 27. Malbroug a ya d'ar Brezel.
- 28. Mont a raimp d'ar Chase.
- 29. Kleierigoù.
- 30. An Tabouliner Bihan.
- 31. Mammig ar C'hizhier.
- 32. Me 'n eus ur C'hazhig.

Niv. Paj.

KANAOUENNOU A GARANTEZ.

- 33. Loeizaig ha Perig.
- 34. Pierig ha Fransoezig.
- 35. Son Helena.
- 36. Ar Goulenn Eured.
- 37. Ar Vatezh Vihan.
- 38. An Durzhunell.
- 39. War Bont an Naoned.
- 40. Me a savo un dourell.
- 41. An Teir Seizenn.
- 42. Tuchant ec'h erruo an Hañv.
- 43. Setu echu ar Goafv.
- 44. Luskellerezh.
- 45. Ar Goafv a zo tremenet.
- 46. Jani.

KANAOUENNOU FENTUS.

- 47. Yannig ar Mil Hicher.
- 48. Ar C'hi en Dienn.
- 49. Son ar C'hafe.
- 50. Soubenn ar Yar.
- 51. Sonig ar C'havr.
- 52. An Anduilhenn.
- 53. Son ar Pilhaouer.
- 54. Me 'gar Filo.
- 55. Julig ar Ververo.

AR MICHERIOU.

- 56. An Hader.
- 57. Ar Miliner Drant.
- 58. Kan an Dud a Vor.
- 59. Me zo ganet e-kreiz ar Mor.
- 60. Paotr ar Yeoded.
- 61. Luskell, va Bag.
- 62. Bageerien ar Volga.
- 63. Mintin war ar Mor.
- 64. Sav, Breizh-Izel.

55. E-barzh ar C'hoadoù Glas. 70. Va Zi Bihan.
 66. Ar Nevez-Amzer hag ar Goanv. 71. Hirvoudoù.
 67. Santa Lucia. 72. O Tregas Fall.
 68. Ar Bluzhenn. 73. Serr-Nez.
 69. Ar Razh-Koad. 74. Konavo.

+ + + + +

D A S T U M A D S K O L .

<u>Rummad Kozh.</u>		<u>Priz:</u>
Niv.	1. Ar C'hembraeg hag ar Skol.	3 lur.
	2. Kelenneredur ar Frizeg. (diviet).	
	3. Douaroniezh Vreizh, gant A. Guilcher.	3
	4. 3 O O Divinadell. (diviet)	
	5. Rimadelloù hag Unangomzoù.	3
	6. Kudennoù ar Skolioù er Slesvig.	3

Rummad Nevez.

	1. Skol Sant Erwan. (Diviet)	
	2. Nodelog en Breizh, Pevar Fezh-C'hoari gant Jarl Priel.	5
	3. Danevelloù diwar-benn Skol St Erwan hag ar Bleuñ-Brug	3
	4. Kontadennoù Kozh ha Nevez, ul Levr da gelenn ar yezh er gêr hag er skol, gant A. Ar C'halvez.	7
	5. Danevelloù a bep seurt.	3
	6. Daou vloavezhriad e Skol Sant Erwan.	3
	7/8. Krennlavarioù Dastumet ha renket gant F. Kervella.	6
	9. Kanaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul, gant M. de Glandour.	4
	10. Ar C'hembraeg hag ar Skol, gant A. Ar C'halvez.	5
	11. Face au Problème de la Culture dans la Bretagne d'aujourd'hui.	4
	12. Ar Brezhoneg er Skol.	3
	13/14. AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU, Abeozen. I.	8
	15. Prizoniad ar C'haokaz, gant Tolstoï.	3
	16. Breizh hag ar Bed, Pennadoù Kelaouenn gant H. Konan.	4
	17/18. AL LENNEGEZH VREZHONEK, Abeozen. Eil levrenn.	8
	19/20. EVEZH LADENNOU WAR C'HERIADUR R. HEMON, gant F. Kervella.	8
	21. Eil 1963, Pennadoù a bep seurt.	3
	22/23. EVEZH LADENNOU WAR C'HERIADUR R. H. Eil levrenn.	8
	24. Dek Fezh-C'hoari evit ar Skolioù.	4
	25. Tri Fezh-C'hoari, gant ar Breur Konstansius ha Klaoda 'r Prad.	4
	26. Fezhioù-C'hoari, gant Dir-na-Dor (E. Ar Moal).	4
	27. Mouezh Sant Erwan, Niv. 1. (Kannadig B.S.E.)	3
	28/29. GWIR VRETONED, Mouladur Bras.	6

30. Mouezh Sant Erwan, Niv. 2, diwar-benn URDD GOBAILH CYMRU. 3
 31. Pentos Niveriñ, Kontañ ha Muzuliañ e Brezhoneg, gant
 Kelennerien Ober. (eil mouladur kresket ha gwellaet) 3

 S K O L , dastumadenn drimiziek a gelennouriezh. Koumanant-bloaz: 12 1
 C.C.P. REVUE SKOL, RENNES 1911 06.

Directeur-Imprimeur-Gérant: Abbé Armand LE CALVEZ, Crec'h-Avel,
 LANNION. 22. BRITTANY.

Dépôt légal: 2-e trim. 1965. Périodique inscrit sous le N° 35 323.

